

Ma anv :



Kaier ar skolidi

Élisa Bleunven, Martine Kervestin,
Émilie Sellin ha Jérôme Palud

Tresadennoù : Malo ar Menn

Taolenn

PRANTAD-SKOL 1

Sizhun	Roll-labour	Pajenn
1	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
2	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
3	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
4	<i>Deskiñ gerioù dre gomz. Stagañ gant al lenn ha skrivañ</i>	
5	<i>Deskiñ gerioù dre gomz. Stagañ gant al lenn ha skrivañ</i>	
6	Kentel 1 vogalennoù, ou-où, l, r, m, s, ch	4
7	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	

PRANTAD-SKOL 2

Sizhun	Roll-labour	Pajenn
8	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
9	Kentel 2 vogalennoù, l, r, m, s, ch + f, n, v, j, z	8
10	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
11	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
12	Kentel 3 vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z + p, b, t, d	12
13	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
14	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	

PRANTAD-SKOL 3

Sizhun	Roll-labour	Pajenn
15	Kentel 4 E e Er c'hantin	16
16	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
17	Kentel 5 K k Kollet eo ar c'hartoù	22
18	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
19	Kentel 6 C'h c'h Skol al loened	28
20	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
21	Kentel 7 en enn Loened iskis	34

PRANTAD-SKOL 4

Sizhun	Roll-labour	Pajenn
22	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
23	Kentel 8 an ann añ Ar majisian	40
24	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
25	Kentel 9 G g Gw gw Gwastell ar rouaned	46
26	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
27	Kentel 10 in iñ Sac'h Milo	52
28	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	

PRANTAD-SKOL 5

Sizhun	Roll-labour	Pajenn
29	Kentel 11 iv av ev Ar c'havr hag an dañvad	58
30	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
31	Kentel 12 An dartezenn chokolad	62
32	Kentel 13 Ar piknik	68
33	Kentel 14 Kouezhet eo an dant!	72
34	Kentel 15 An euzhvil	78
35	Kentel 16 Al liorz-h-kêr	84

la li ol ru ar lo ri il
ma mo mi mou rou lu is
os su sou` as sa al cha
och chu cho chou ous our

ar mor ar Sul ul loa chas al loch lus
mouar ar ru imor ar sal lasou` mourrou`
al loar ul lama cholori un amiral ur roll
un ali malis salsa lous sioul rous asur
ral moal lichous mil chom chuchumuchu
Malo Maria **Lila** Rio **Lima** Rusia **Raoul**

Ar Sul zo.

Sioul eo ar mor.

Chas rous zo el loch.

Lus ha mouar zo er ru.

Chuchumuchu! Cholori zo er sal.

Lous eo ma lasou`.

Salsa zo e Rio.

Moal eo Malo.

Ul lama zo e Lima.

Lila zo o chom e Rusia.

Lichous eo Maria.




1 Skrivañ gerioù.

lo cho
ri



ral a
mi



chu mu chu
chu



2 Skrivañ gerioù.

la • chous

li • sa


sal • soù

1.


2.

3.

3 Skrivañ gerioù.



la ous ra soù



ar om mou or

4 Lenn ha tresañ.

al loar

ar mor

ul loch

mourrou

ul loa

rous

5 Lenn ha tresañ.

Moal eo Malo.

Ul lama zo er ru.

Chas rous zo el loch.

6 Skrivañ frazennoù.

Sioul
Moal.

eo

- Malo.
- Lila.
- ar mor.

1. Sioul eo Lila.

2.

3.

7 Skrivañ frazennoù.

Lous lasoù. ma eo

zo ru. er Mouar

sal. zo Cholori er

ni na no fo fu va vi fa
aj za az foù fi zoù if vo
ji jouè uj four mar for far
jal mouz iza fro soul

un aval avaloù farz-forn ur film ur foar fourmaj
forn fri fulor un iliz ilizoù livaj ul louarn
louzoù al Lun ul luj Mamm marmouz ur sifr sili
ur siminal ur vi vioù sivi ur zoo noz nijal
null fall ral fur flour farsus foll amourous
avius Sina Anna Liz Liza Nina Soaz

Al Lun zo.

Amourous eo Soaz.

Avaloù zo er farz-forn.

Ral eo vioù roz.

Al luj zo o nijal.

Sioul eo an noz.

Farsus eo ar marmouz.

«Alo?» a lavar Nina.


Flour eo fri al louarn.

Vioù zo er siminal.



1 Skrivañ gerioù.

a loù
va



si nal
mi



a rous
mou



2 Skrivañ gerioù.

fu • jal
lou • lor
ni • zoù
far • sus


1.

2.


3.

4.

3 Skrivañ gerioù.



our maj four jam



mar mouch ram mouz

4 Lenn ha tresañ.

riz

sivi

ur fri

ur vi

roz

un aval

5 Lenn ha tresañ.

Ruz eo an avaloù.

Livaj roz eo.

Sivi zo er forn.

Ar marmouz a ra luj.

6 Skrivañ frazennoù.

Flour
Farsus
Fur

eo

• ar marmouz.
• Liza.
• al louarn.

1. Flour eo al louarn.

2.

3.

7 Skrivañ frazennoù.

Roz eo ar marmouz. fri

zo farz-forn. er Avaloù

Vioù er zo foar.

**pa do doù ip od pou du
ba bi bo bou at it ta ti
toù ot to di ud ob tor
tal poul dur pli par brou**

bara albomoù **ur balum** ul lost **ur biz** bili
bloaz botoù **bouloù** ul labous **un dorn** dour
foto un istor **un nadoz** un oto **ar mirdi** martolod
ur pod pour **un ospital** priz **ur prof** poull-dour
ar plad plijadur **ur rod** ar Sadorn **ur robot** un toull
un ti-post lipous **mat** bras **du** plijus **labourat**
dastum **dibab** lipat **Barbara** Paloma **Paolo** Pariz

Ar Sadorn zo.

Un toull zo en tapis.

En albom emañ ar foto.

O lipat ar plad emañ ar robot.

Barbara a vo tri bloaz disul.


«Alato!» a lavar Paloma.

Bras eo ar balum.

Ur prof zo en diri.

Plijus eo dastum bili.

Ul labous zo en oto.



1 Skrivañ gerioù.

rat bou
la



lod
mar to



tal os
pi



2 Skrivañ gerioù.

mir • • pouz
poull • • di
li • • -dour
ti • • -post


1.

2.


3.

4.

3 Skrivañ gerioù.




na toz ma doz




al bous la tous

4 Lenn ha tresañ.


botoù




ur rod




un oto




pour



bara




ur biz




5 Lenn ha tresañ.


Ur balum zo en dour.




Lost al labous zo du.



Ur prof zo war an diri.



Un toull zo en tapis.



6 Skrivañ frazennoù.

Ar mirdi
Al labous
Ar pour

zo

• du.
• bras.
• lipous.

1. Ar mirdi zo bras.

2.

3.

7 Skrivañ frazennoù.

dastum

eo

bili.

Plijus

O lipat

plad

ar

emañ.

pevar

a vo

bloaz.

Paolo

E e

per mel **lunedoù** stered **ar bed** ur peroked
ur roue un armel **un teod** ur bouteg **ur voger**
boued **ar menez** gevier **patatez** tomatez **karotez**
bananez **kerez** kourjetez **nevez** melen **pevar**
pell **pounner** echu **redék** bale **sevel** dale **me**
te **pe** adarre **marteze** perak **petra** Teo **Ewen**

Lila zo o vale e Menez Are.

Bale, redék, bale adarre, redék adarre, pell! pell!

Emañ o redék war ar menez. Badadaou!

Dale zo gant Teo. Kollet eo e velo.

Melen eo lunedoù Mia.

Hir eo teod ar peroked. Kontet en deus gevier.



Er c'hantin

Boued lipous zo er c'hantin : patatez nevez, tomatez ha karotez melen.

« Mat eo ar boued! » a lavar Liza.


Ha n'eo ket echu : bananez, kerez ha chokolad.

« Me 'gav mat chokolad! Unan all 'mo! » a lavar Milo.




4 Skrivañ gerioù.


ta pa
teyz



je teyz
kour



teyz ma
to



5 Klokaat ha skrivañ gerioù.

pe

ne

ked

me



ur nez



lu doù



ur ro

K k

ur pok ur pakad **ur rekiye** ur boked **chokolad**
kamera **kaier** pesk **miz Kerzu** kerez **kub**
skol **skolidi** kastell **muzik** kaner **kador**
koala **kef** koad **matematik** kakao **karantez**
karrez **kalet** kozh **kalon** barrek **chik** dek
dirak kalz **kas** pesketa **redék** kemer **koll**
Kanada **Korsika** Rosko **Katell** Kaou


Kouezhet eo kador Katell.

Dek koala zo o redék e koad Keroual.

Tud chik zo o pesketa e Korsika.

Kaner eo Kaou, plijout a ra kalz ar muzik dezhañ.

Ar skolidi ne gavont ket mat kafe ha chokolad.



Kollet eo ar c'hartoù

Milo ha Liza zo e skol Rosko.

« Kollet 'm eus kalz kartoù! a lavar Milo.

— Klask dirak kador Katell, a lavar Liza.

— N'eus ket! a lavar Katell.

— Sellet 'peus dirak an armel? a c'houlenn Keo.

— Youc'hou! Kavet eo an dek kartenn! » a huch Milo.

Ur pok a ra Milo war jod Liza!




4 Skrivañ gerioù.

ko cho
lad



ra ka
me



ta pes
ke



5 Klokaat ha skrivañ gerioù.

ka

ked

ko



__ala



__lon



bo__



C'h c'h

ur c'hi ur c'hazh **ur marc'h** ur c'hoad **plac'h**
erc'h **ur pemoc'h** ur c'hastell **ur vuoc'h**
ar c'harotez **c'hoariva** sac'h **un tric'horn**
ur c'hleze **ur c'hoari** ur roc'h **ur c'hrokodil**
ur c'hloc'h **ur c'helc'h** ur c'harr-nij **ur c'hamera**
c'hoari **c'hoarzhin** kelc'hiañ **warc'hoazh** pelec'h
dimerc'her Ar Roc'h-Morvan **Marc'harid**


Ur c'hi zo o c'hoari en erc'h.

Ar c'harotez zo poazh.

O c'haloupat emañ ar vuoc'h.

E koad ar c'hastell emañ ar plac'hig o c'hoarzhin.

C'hoariva a vo er Roc'h-Morvan warc'hoazh.



Skol al loened

Ur wech e oa ur plac'h, Marc'harid he anv, o chom en un ti-feurm gant ur c'hi du, ur c'hazh gwenn ha loened all, bras ha bihan.

C'hoari skolid a veze graet bep Merc'her.

Marc'harid e oa ar vestrez-skol.

« Pelec'h emañ an tric'horn ? a c'houlenn Marc'harid.

— E-barzh ar c'helc'h ! a respont ar marc'h.

— Ket ! Pelec'h emañ an tric'horn ? a c'houlenn Marc'harid adarre.

— E-kichen ar c'helc'h, a respont ar vuoc'h.

— Mat-tre ! a lavar Marc'harid.

— Diling ! Diling ! a ra ar marc'h gant ar c'hloc'h.

— Echu eo ar skol ! » a huch ar vestrez-skol.

Strakal en o daouarn a ra an holl. Laouen eo al loened.

C'hoarzhin a reont.

1 Gwir pe gaou?

E-barzh ar c'helc'h emañ an tric'horn.

E-kichen ar c'helc'h emañ an tric'horn.

Ar vuoc'h e oa ar vestrez-skol.

2 Skrivañ frazennoù.

a ra

C'hoarzhin

plac'h.

ar

c'hloc'h.

a gemer

Marc'harid


ar

5 Klokaat ha skrivañ gerioù.


moc'h

c'horn


c'harr



ur pe_____



ur _____-nij



un tri_____

6 Skrivañ ur frazenn.

C'hoari •

• skoliq •
• ar c'hartoù •

• a ra •

• Marc'harid.
• ar vuoc'h.

en enn

penn sivienn **jirafenn** ul logodenn **ur favenn**
un azen **ur farsadenn** ul lodenn **un doenn** kurunenn
tomatezenn ur valafenn **un dulipezenn** ur gazetenn
holen loen **ur volenn** bolotenn **merenn** melen
gwenn kempenn **goulenn** diskenn **pourmen**
lenn **e-kichen** pegen **Youenn** Gwenn

Pegen brav eo an dulipezenn velen!

E-kichen ar jirafenn emañ al logodenn.

Holen mar plij! a c'houlenn Youenn.

O nijal emañ ar valafenn wenn.

Kavet en deus ar favenn ha lakaet ur gurunenn war e benn.



Loened iskis

« Oc’h ober petra emañ ar jirafenn ? a c’houlenn Tadig.

— O lenn ar gazetenn emañ, a lavar Milo.

— Pegen iskis eo al loen-mañ ! » a lavar Mammig.

« Oc’h ober petra emañ al logodenn ? a c’houlenn Tadig.

— O livañ ur gurunenn emañ, a lavar Milo.

— Pegen brav eo ar gurunenn velen ! » a lavar Mammig.

« Oc’h ober petra emañ an azen ? a c’houlenn Tadig.

— O kempenn an ti emañ, a lavar Milo.

— Pegen jentil eo an azen-mañ ! » a lavar Mammig.




1 Gwir pe gaou?

O kempenn an ti emañ an azen.

O lenn ar gazetenn emañ ar jirafenn.

O livañ ar gazetenn emañ ar valafenn.

2 Liammañ.



- Emañ al logodenn o redek war-lerc'h an azen.
- Emañ an azen o redek war-lerc'h al logodenn.
- Pegen brav eo an dulipezenn velen!

5 Klokaat ha skrivañ gerioù.


zen

tenn


lenn



ur vo_____



ur volo_____



un a_____

6 Skrivañ ur frazenn.

Pegen •

- bras •
- bihan •

• eo •

- al logodenn!
- ar jirafenn!

an ann añ

ur ran un amprevan **un avank** un olifant **un oan**
ur c'hañval **un dañvad** ur banne **amann** fank **ehan**
ur vantell **ur bank** an tan **ur majisian** ur c'horrigan
mann unan **kant** buan **ledan** orañjez **moan**
emañ **azezañ** evañ **kanañ** keginañ **livañ** pegañ
tresañ profañ **skrivañ** azezañ **dindan** gant **ennañ**
amañ **bremañ** Chann **Gurvan** Lokournan **Japan**

Poent eo azezañ war ar bank bremañ!

Emañ Yann oc'h evañ ur banne chug orañjez.

Dañsal a ra an oan hag an dañvad er park!

« Setu amann evit keginañ », a lavar Gurvan ar c'horrigan.

Tomm-kenañ eo, tan zo e ti Chann!



Ar majisian

Loened farsus zo e ti ar majisian. Dañsal a ra an avank. Lammat a ra ar c'hañval. Kanañ a ra an olifant hag an dañvad. Pebezh cholori!

« Skuizh on gant an trouz! » a lavar ar majisian.

Dañsal, lammat ha kanañ a ra al loened atav.

« Unan, daou... abrakadabra! a lavar ar majisian.

— Pelec'h emaint bremañ? a c'houlenn ar c'horrigan.

— Sell, azezet int war ar bank. »

Emañ ar c'hañval o skrivañ, an olifant o livañ hag an dañvad o tresañ. Pegen fur eo al loened bremañ!



1 Gwir pe gaou?

Kanañ a ra ar majisian.

Kousket eo an olifant.

Dañsal a ra an avank.

Tresañ a ra an dañvad.

2 Liammañ.



•



•



•

- Kanañ a ra an avank.
- Dañsal a ra an dañvad.
- Fachañ a ra ar majisian.

5 Klokaat ha skrivañ gerioù.

zañ

fañ

gañ

vañ



pro _____



arze _____



pe _____



li _____


6 Skrivañ ur frazenn.

Dañsal •
Skrivañ •

• a ra •

• ar c'horrigan •
• an olifant •

• e-barzh ar fank.
• war ar bank.



G g Gw gw

ul logodenn un aligator **ur gurunenn** ur maligorn
ur gazeg un tog **ur babig** ur gambr **ur gador**
ur madig **ur redadeg** ur bisig **geot** bugale
ur gitar godell **ur gegin** gwez **gwastell** ur gwele
gevier Mammig **Tadig** gwenn **gwir** gaou **ugent**
gortoz **goulenn** gwelet **digwener** gant **ganin**
Genver **Gwengolo** Gurvan **Gwenola**


Ur gurunenn zo war penn al logodenn.

Un aligator hag ur bisig zo o c'hoari rugbi er geot.

Un tog gwenn zo war penn ar babig.

E miz Gwengolo e vez laouen ar vugale o vont d'ar skol.

Emañ Gurvan o seniñ gitar azezet war ar gador.



Gwastell ar rouaned

Miz Genver eo. Emañ ar vugale o tebriñ gwastell ar rouaned er gegin.

« Piv 'neus bet ar favenn ? a c'houlenn Mammig.

— Me! Rouanez on bremañ! a lavar Liza.

— Gortoz! Mammig zo o tont gant ar gurunenn, a lavar Tadig.

— Gevier tout! a huch Nina, ar c'hoarig vihan. Ganin emañ, sellit!

— N'eo ket gwir alato! » a respont Tadig o c'hoarzhin.



1 Gwir pe gaou?

Gant Liza emañ ar favenn.

Miz Gwengolo eo.

Mammig zo o tont gant ar gurunenn.

2 Klokaat ha skrivañ gerioù.

go

ga


gi



ul lo denn



bu le



ur bell

3 Lenn ha tresañ.

geot

ur gador

ur gitar

4 Skrivañ frazennoù.

gwir

N'eo

alato!

ket

c'hoarig vihan

ar

Gant

emañ

favenn.

ar

5 Skrivañ ur frazenn.

Emañ •

- al logodenn •
- an aligator •

• o c'hoari •

- er gegin.
- er geot.



in iñ

ur furlukin un delfin **ul lapin** ar gegin **ur vilin**
medisin **ribin** jardin **ur poñsin** ur rinkin **ur sapin**
ar c’hantin **un heureuchin** ar fin **un diñs** ur briñsez
an dijuniñ sardin **tintin** rezin **pinvidik** mibin
beajiñ debriñ **digeriñ** echuiñ **jediñ** sentiñ
dihuniñ flapiñ **kampiñ** dindan **a-benn ar fin**
Matilin **Marzhin** Trifin **Gwerliskin** Finland **India**


Matilin zo er gegin o tebriñ sardin.

An delfin zo o flapiñ er c’hantin.

Bet eo Marzhin o kampiñ e jardin tintin Mari.

Chug rezin a vo mat da zijuniñ.

Pevar lapin ha daou boñsin zo dindan ar sapin.



Sac'h Milo

Emañ Milo o flapiñ gant Liza er ribin. Kalz traoù zo e sac'h Milo : un deltenn, ur sac'h-kousket... Pounner-kenañ eo.


« Pebezh sac'h evit mont d'ar skol! a lavar Liza.

— Mont a ran da gampañ! a lavar Milo.

— Pegen chik! Plijout a rafe din mont ivez », a lavar Liza.

Ha dao! Aet eo Milo kuit, o vale mibin.

« Chom a rin ma-unanig », a lavar Liza, a-benn ar fin.



1 Gwir pe gaou?

Flapiñ a ra Liza ha Milo.

Mont a ra Milo da gampiñ.

Pounner eo sac'h Liza.

2 Liammañ.



Liza •

- Mont a ra da gampiñ.



Milo •

- Chom a ra he-unanig er ribin.

3 Kelc'hiañ ha kopiañ.



- O kampiñ e-barzh un deltenn emañ Matilin.
- O kousket er jardin emañ Trifin.
- O kampiñ e-barzh an ti emañ Célestine.

4 Skrivañ gerioù.

ju di
niñ



dik pin
vi



fur kin
lu




5 Klokaat ha skrivañ gerioù.


fin

kin


din



ur rin _____



sar _____



un del _____

iv av ev

ul liv riv **div** liesliv **divskoaz** divjod **piv**
hiziv **ur c'havr** un avank **un aval** fav **glav** pav
avi tanav **brav** avius **nav** ur burev **blev**
ur vlevenn ur favenn **tev** resev **Andrev** Mazhev

Ruz eo divjod Andrev.

Barradoù glav zo hiziv.

Resev a rin ur prof hiriv gant paotr-al-lizhiri.

Tanav eo evel un delienn faou.

Pet favenn a ya d'ober nav?



Ar c'havr hag an dañvad

Ur c'havr hag un dañvad zo er prad. Poan en e c'har en deus an dañvad. Gloazet eo bet gant ul loen all.

« Piv 'neus graet poan dit? Ur bleiz marteze? »

— N'eo ket. Ur pezh loen tev eo.

— Ul loen tev gant kerniel?

— Ya, ur pezh tarv kozh. »



1 Gwir pe gaou ?

Gant ur bleiz eo bet gloazet an dañvad.

Poan-benn en deus an dañvad.

Gloazet eo bet gant un tarv.

2 Kelc'hiañ ha kopiañ.



- Liv ruz zo war divjod Andrev.
- Hir eo fri Malo.
- Hir eo blev ha barv Mazhev.

3 Skrivañ gerioù.

jod




div

rev

skoaz

div

bu



4 Lenn ha tresañ.

un aval blev hir ur c'hazh liesliv

5 Lenn ha tresañ.

Emañ ar c'havr dindan ar glav.

6 Skrivañ ur frazenn.

Riv en deus • • an tarv • • brav • • dindan ar glav.

• an dañvad • • tev •

An dartezenn chokolad

Fest zo e ti Milo. Kamaraded zo o tont.

Emañ o kas un dartezenn chokolad war an daol.

« Diwall, Milo! » a lavar Tadig.

Badadaou! Kouezhet eo Milo war e benn en dartezenn.

Driiing!

« Demat », a lavar Milo, du e fri gant chokolad.



4 Lenn ha tresañ.



Div dartzenn zo war an daol :
unan gant sivi hag unan gant
chokolad.

5 Skrivañ frazennoù.

Milo. Du fri eo

kamaraded a ra Milo. C'hoarzhin

Ar piknik

Emañ Milo o tebriñ ur piknik war bord ar mor gant Tadig ha Mammig.

Teurel a ra paperioù madigoù war an traezh.
Nijal a reont gant an avel.

« Alato! Pemoc'h lous! » a lavar Mammig, fuloret.

Mezh en deus Milo. Ne raio ket ken. Met debriñ a raio madigoù atav!



1 Gwir pe gaou?

Fuloret eo ar pemoc'h lous.

Teurel a ra Milo madigoù war an traezh.

Debriñ a ra Milo ur piknik war bord an hent.

2 Respont.

Pelec'h emañ Milo hag e familh?

emañ Milo hag e familh.

Piv eo ar pemoc'h lous?

eo ar pemoc'h lous.

3 Kelc'hiañ ha kopiañ.

Perak en deus mezh Milo?

- Ne gav ket mat madigoù.
- Gourdrouzet eo bet gant Mammig.
- N'en deus ket lakaet an tamm paper er boubellenn.

Kouezhet eo an dant!

O leñvañ emañ Liza.

« Kouezhet eo ma dant! Un toull bras zo e-barzh ma genoù!

— Arabat dit leñvañ! Un dant all a zeuio war-lerc'h! » a lavar Mammig.

Digeriñ a ra Liza he genoù dirak ar melezour.


N'eo nemet un toull bihan!

Tad Liza a lak an dant e-barzh ur mouchouer.

« Lakaet e vo an dant dindan da c'houbenner, a lavar Tadig.

— Perak 'ta? a c'houlenn Liza.

— Dont a raio al logodennig. Kemer a raio da zant ha reiñ ur prof dit! »



1 Gwir pe gaou?

Kouezhet eo dant Liza.

E-barzh ur voest emañ an dant.

Un toull bras zo e genoù Liza.


2 Respont.

Perak emañ Liza o leñvañ?

Petra a wel Liza er melezour?




Piv a gemero dant Liza?

3 Kelc'hiañ ha kopiañ.




- Un dant zo war ar goubenner.
- Al logodennig hag an dant zo dindan ar goubenner.
- Un dant zo dindan ar goubenner.

4 Liammañ.



- E-kichen ar gwele emañ ar melezour.
- Dindan ar gwele emañ ar goubenner.
- Dindan ar gwele emañ toull al logodennig.

5 Lenn ha tresañ.



Kouezhet eo dant ma breur.
O leñvañ emañ.

8 Klokaat an destenn gant ar gerioù.

an dent

ar genoù

toaz

a-dreñv

dour

Evit kaout dent naet ha yac'h :

1 Lakaat

 war ar broust-dent.

2 Diouzh ar mintin ha diouzh an noz, broustañ mat

 : dirak,


 ha war


ar c'hostez, e-pad tri munut.

3 Riñsañ

 hag ar broust gant

.





An euzhvil

Kouezhet eo Liza diwar he gwele en noz-mañ.

« Mammig! Mammig! Mammig! a huch Liza, o leñvañ.

— Petra zo, ma dousig? a c'houlenn Mammig.

— Klevet 'm eus un euzhvil dindan ma gwele, a respont Liza.

— N'eus euzhvil ebet, a lavar Mammig. Ur gwallhunvre 'peus graet.

— Sur out? a c'houlenn Liza.

— Lavar din penaos e oa da euzhvil. Kofek gant ur genoù ruz?
Nijal a rae dreist ar gwele?

— Ya, evel-se e oa! Gwelet 'peus anezhañ ivez? a c'houlenn Liza,
laouen.

— Evel-just, graet 'moa ar memes gwallhunvre pa oan bihan,
a lavar Mammig. Noz vat, ma dousig! »



Al liorzh-kêr

Brav eo an amzer. Emañ Milo, Nina hag o mamm en ul liorzh-kêr e Naoned. Pourmen en natur a blij dezho.

Galoupat a ra Nina war-zu an houidi. Kwak, Kwak!
Nijal a reont, splujañ a reont er poull.

« Chom sioul 'ta! Arabat spontañ an houidi! a lavar Milo.

— Deomp goustadik war ar ribin, a lavar Mammig. Emañ an houadez war ar poull-dour, he houidi bihan war he lerc'h.

— Pegen moutik int! a lavar Nina.

— Pevar warn-ugent! Pevar houad warn-ugent zo war ar poull! »
a lavar Milo, laouen.

War ur vrañsigell ez eont goude-se, uhel, uhel! C'hoarzhin a reont kalz.

« Naon 'm eus, a lavar Nina d'he mamm.

— Deomp neuze da welet ar marc'hadour », a respont Mammig.

Prenañ a ra ur skornenn chokolad hag ur gouignenn gant avaloù.
Laouen eo ar vugale.

1 Gwir pe gaou?

O pourmen en ur c'hoad emañ Milo, Nina hag o mamm.

Pevar houad ha tregont zo war ar poull.

Madigoù zo bet prenet gant mamm Milo ha Nina.

2 Respont.

Pelec'h emañ Milo, Nina hag o mamm o pourmen?

Peseurt loened zo war ar poull?



Petra zo bet prenet er stal?

3 Kelc'hiañ ha kopiañ.




- Emañ Milo ha Nina o nijal evel houidi.
- Emañ Milo ha Nina o vale sioul war ar ribin.
- Emañ Milo ha Nina o c'haloupat war-zu an houidi.

4 Liammañ.



- Sioul evel ul logodenn eo Nina.
- Fin evel ul louarn eo Nina.
- Laouen evel ur pint eo Nina.

5 Lenn ha tresañ.



Un houad hag ur vag zo war
ar poull-dour. War ar vag
ez eus ur plac'hig.

6 Skrivañ ur frazenn.

eo

Laouen

vugale.

ar

warn-ugent

houad

war

Pevar

zo

poull-dour.

ar

7 Klokaat an destenn gant ar gerioù.

laouen

poull-dour

marc'hadour

liorzh-kêr

skornenn

O pourmen emañ Milo, Nina hag o mamm

en ul

e Naoned.

Ur stal zo e-kichen ar

Naon en deus Nina. Mont a ra ar familh da welet ar

Prenañ a ra ar vamm ur

hag ur gouignenn.

eo ar vugale.

10 Skrivañ.

an houad

ar vugale

al louarn

nijal

splujañ

pourmen

• Sell 'ta! Emañ

o

er poull.

• Sell 'ta! Emañ

o

war ar ribin.

• Sell 'ta! Emañ

o

el liorzh-kêr.

